

ENTRETIEN⁴

ETRE

UR MISSIONNER

HAC

UR MEVIER.

Voar an dangeriou eus ar Me-
venti, hac he Remejou.



E QUEMPER;

Gant SIMON-MARI PERIER, Im-
primer ha Librer.

Gant Permission.



ENTRETIEN

*Etre ur Missioner hac ur Me-
vier, voar an dangeriou
eus ar Meventi, hac he
remejou.*

Ar Missioner.

P Eleac'h it-hu quen drouc livet?

Ar Mevier.

Da glasq Midicin ha yec'het.

Ar Missioner.

Me vezo sur ho Midicin,
Mar quirit efsat senti ouzin.

Ar Mevier.

Ret eo deoc'h goufout va c'hlenvec
Quent prometti din ar yec'het.

Ar Missioner.

Livirit din-me peleac'h
Da glasq Midicin efsac'h,
Ha m: lavaro ar remed

A so mat evit ho cleavet.

Ar Mevier.

Ret eo din eta quent cofes
 Discleria deoc'h ar viriones ;
 Mæs Autrou, n'en em fachit quet ,
 Guel ve prepari ho remed.
 Guin rus re a efis deac'h ,
 Hac hirio ne don quet yac'h ;
 Dar guin guen e fel din monet
 Evit ma vezin pareet ,
 Hac ar remed-man a so mat
 Evit ur mevier guellaat.

Ar Missioner.

Mar ema an tan et solier ;
 Ha mat e-n tan a allumer
 Er pevar c'horn cus a un ti
 Evit e ampeich oll da zevi ?

Ar Mevier.

Allumet sur eo va fenn ,
 Hac em c'halon so goas anquenn ;
 Va c'horf so tout evel flastret
 Ha n'emboa deac'h taol ebet ;
 D'am c'hrec unan pe zaou a rois ;
 Ne songean quet e recevis ;

Bet co er Retret a nevez
 Leun co breman a vadclez,
 E quenver he faourquæs mevier,
 E laquec quellies e coler.

Ar Missioner.

Mui oc'h coupabl da dourmanti
 Ur c'hrec vat evel oc'h hini.
 Mæs lesomp breman quement-se,
 Guelomp penaos e veot pare.

Ar Mevier.

Ur miracl a reot nonpas dister,
 Mar convertissit ur mevier;
 N'eusquet emaindi, ur pec'her,
 Na chencho quent evit mevier.

Ar Missioner.

Ha me lavar n'eusquet unan
 Gant graç Doue ma n'er chenchan
 Mar fell dezan senti ouzin
 Ober ar pez a livirin.

Ar Mevier.

Mæs mar livirit ivez re,
 Guelet a rit ne doun quet cre;
 Va ners er guin a so beuset
 Hac an anter eus va yec'het.

5
Ar Missioner.

Eleac'h ho ners diminui
Evit ma cresco me rai
Quenta tra endeus da ober
Evit ar guella ur mevier,
Eo renonç d'ar guin maleürus
A so dezan quen dangerus.
Oc'h ar feunteun-man tostait,
Sec'het oc'heus ac'han esit
Da ur Sant ezeo consacret
Aman e caffot ho remed;
E meur à blaç ar feunteuniou
A ra cals a viraclou,
Ma na es nemet anezo
Ar mevier sur a bareo;
Mæs ar miracl-se a vezo dilect
Da c'hraç hor Salver biniguet,
Pe dre hini e renonço
Dar guin ar mevier a chencho.

Ar Mevier.

Penaos va Zat, nemet dour,
Pa vin squis memes em labour
Pa zeuin eus an hent var droat
O c'huefi casi ar goat.

Ar Missioner.

Ne dremenot quet ar chopin,
 Mar promettit er permettin
 Mæs liquit evez d'am zrompla
 Oc'h ober ur fals promessa.

Ar Mevier.

Mar doc'h tromplet dre va clhōsou
 Me zougo tout ar pec'hejou,
 Rac-se, rac aon da fasia
 Ha me mui evidoc'h trompla,
 D'ar guin adeo tout a fet
 Pe mevier e vezin bepret;
 Ma ve roet din chopinat
 Souden e c'houlennen pintat,
 Hac hep gaou ar variquen
 Ma ve plaç dezi a effen.

Ar Missioner.

Penaos n'illit quet arreti
 Evit efa gant modesti
 Ar pezh hepquen so neccesser
 D'ho tioual, va map, dioc'h danger
 Da goueza en ur goal glenvet
 Dre re labour pe re querfet.

7
Ar Mevier.

Leis e goff a fell d'ar mevier ;
Ne voar quer effa gant moder ;
Mar fell deoc'h en em modero
Dour hepquen , va Zat , a effo.
Me meus guelet meur a hini ,
Bet e voant o coffes , e maindi ,
Gant tut habil ha tut santel
A ancounec'has ur guentel.
Permetet voa deo chopinat ;
Ha goude allas ! pet pintat
Ameus me va hunan efet
Gant an feurt-se penitantet !
Ho trompla a reomp , Beleyen ,
Ha bepret esomp meverien ,
Ha rac-se , Autrou , dalc'hit mat
Adeo memes d'ar chopinat ,
Mar fell deoc'h ur vech e chenchin
Ha biquen mevier na vezin.

Ar Missioner.

A c'hui gare ober ul le
N'effot quet memes ur banne
Songit : rac goude eve pec'het
Pa ne veac'h quet memes mevet.

Ar Mevier.

Ha mar de ret touët e rin;
 Evit guelloc'h ma tiouallin.

Ar Missioner.

Cusul, va map, voat ar poent-se
 Rac nequet mat bepret al le,
 Ur C'honfessour oc'h anaveo
 Mar de fur guel e lavaro
 Ha mat eve e reac'h ul le,
 Ha pegueit e pado an dra-se;
 Guelet emeus à so bet furoc'h
 Ha re all so bet coupaploc'h
 Goude al le o devoa gret
 Guin n'o divise quet effet:
 D'an avis, va map, o cassan
 Mar em c'hridit sentit outan.

Ar Mevier.

Mar lavar din n'effin banne
 Ret co eta miret va le.

Ar Missioner.

Bete an amser a vezo merquet
 Autramant e reot ur pec'het,
 Finisset memes oc'h amser,
 Divoallit c'hoas oc'h an danger

A erruas gant un Doct^ror
Eus ho fort : clevit an histor ;
Tri mis ar guin en doa touct
Hac e le en devoa miret
Bete memes an anter nos
Ma tlie monet da repos ;
Mæs cals , emean , endoa sec'het
Rac pel a voa n'en doa effec
Cass a ras eta da glasq guin
Ha buan e cavas ar fin
Eus e vues passeet erfac
Hep efa tri mis bouteillat.
Unan dezan a voa digasset ,
Varlerc'h un all a voa clasquet ;
En ur guer quement a efas
Bete var ar plaç ma crevas.

Ar Mevier.

Hep Belec hac hep Sacramant ,
Penaos voa an Anterramant ?

Ar Missioner.

Ma vifen bet eno Person
M'em bise sur rentet ræson
Rac aon na vise laquet
Ebars en douar biniguet.

Un den maro en e bec'het
 Da zouar ar c'herc'h e gorf so dlet
 Evit ma c'hortoi fin ar bet
 Ma vezo en Ifern taolet.

Ar Mevier.

Mil bennos d'am Salver Jesus
 D'am beza rentet quen eürus
 D'ho peza cavet en dê-ma
 D'am laquat var an hent guella
 Pet maleur a heul ur mevier
 Ha ne ra van oc'h an danger.

Ar Missioner.

Neus quiet ur pec'het er bet-ma
 A zoug sur quellies ganta
 A valeur hac a velconi
 Evel ar pec'het mesventi :
 Mervel a rer subitamant
 Hep receo er bet Sacramant.
 Hac hep rei ar sin diftera
 A c'hlac'har en heur diveza :
 Deja un exempl oc'heus clevet
 Mæs mui ameus da lavaret.

Ar Mevier.

Mar guillit, livir o tout

Rac n'allan quet fiouas ! goufout
 Re a exemplou truesus
 A rent ar mevier maleürus.
 Me o zisco d'am mignonet
 Evit guenen ma vint chenchet ;
 Gant graç Doue a esperan,
 C'hoas ho ficour a c'houlennan.

Ar Missioner.

En dour, en tan hac oc'h ar grouc
 E caf ar mevier meur a zrouc,
 A laca fin d'e bec'hejou,
 Nonpas bepret d'e dourmanchou.

Ar Mevier.

Emeus an dour pa barlantit,
 Me voar da beleac'h em c'hassit ;
 Me gred etrese ur pontic
 A gaver ac'han ul levic ;
 Er gouan an dour eno so bras,
 Hac an tremen a so goas,
 Gair eo o tont eus ar marc'hat
 Betec eno e voa deut mat
 gant e varc'h ar paour quæs mevier
 A chomas e hunan er ster.
 Ar marc'h rac-tal a zeuas d'ar guer

Hep maſtr da gommanç ar glac'har
 Antronos e teuas quelou
 A bep tu emeus ar c'heriou ,
 E voa cavet un den beufet
 Hac ar Juſtiç dezan claſquet ,
 Evit goufout piou voa ar muntret
 D'am mignon bras ur goal mevier,
 Midicin a zeuas gant Juſtiç ,
 Ar Greffier a ſcriff e avis.
 Gant ar guin e bet commançet ,
 Gant an dour e bet achuet :
 Evel-fe Providanç divin
 He deus laquet dour en e vin
 Juſt eo gant Doue permetet
 N'hon neus netra da lavaret.
 Chetu ar fin eus ar procez
 A voa pæt gant an intanvez.

Ar Miſſioner.

Ne ſongen quet en ho mignon
 Nevez deut ezon er c'hanton
 En ur mevier all e ſongen
 En deus roet cals a anquen
 Da dut a roas un taol bas
 Eus ar marc'hat pa fortias

Da ur mevier fal a lavare
 Mil dra infam ha sur meus
 Da dut ne voant quet orgoüillus,
 Evel ho mignon e varvas
 Ecreis an dour ne voa quet bras,
 Mæs ne voa qet an intanvez
 A beas hep quen ar procez.

Ar Mevier.

Pa barlantic a emgannou,
 Me ameus bet cals a daoliou,
 Mæs nemet pa oa effe din
 Neuse e voan terribl taquin,
 Hac evel-se o taquinat
 Douguet emeus meur a vazat :
 Va revanch goude a glasquen
 E Justic gant chicaneurien
 A re din coll gant melconi
 Va arc'hant oll o procesi,
 Evit quement taol ameus bet
 Un diner na meus quet gounceet,
 Mæs muntret gant cals a daoliou
 Collet emeus cals a scoëjou :
 Ar gaou so bepret d'ar mevier
 Chetu c'hoas ase un danger.

Ar Missioner.

Dangeriou all so, celaouit
 Pe da re en em exposit.
 Eus an dour emeus parlantet,
 An tan ivez endeus collet
 Meur a vevier en e bec'het,
 Hac er bet-man endeus devet.

Ar Mevier.

A c'hui vel ar rest a un ti?
 Guech all hennes voa va hini,
 Dre ar guin emeus-en devet
 Ha va hunan evoan grillet.

Ar Missioner.

Da viana c'hoas oc'h beo,
 Ha me barlant a dut maro,
 Ecreis an tan en em dolfont
 Hac eno goude e varffont.
 Cavet e voant ho bleo devet
 Ho fenn duoc'h evit ar mouguet
 A gargue ar gambr eus ar floc
 Capabl da sponta peb mevier.

Ar Mevier.

Ha ne voa den ebars en ti
 Evit abret ho diuni?

Ar Missioner.

An dut a oa et da goufquec
 An daou mevier a voa lefec
 Da vutuni ha da effa
 Bete ma teufont da squifa,
 Squifa refont dre c'hoant coufquec
 Hac er bet all int diunet.

Ar Mevier.

Quement all james na glevis.

Ar Missioner.

Ha m'emeus clevet e Paris
 Ma ne de c'horvet an dra ma
 Arruout a ell da viana.

Ar Mevier.

Guir eo ar pezh a livirit
 Ha dre quement-se em spontit.

Ar Missioner.

Aon oc'heu-u rac ar potanç ?

Ar Mevier.

Ne garan quet sur ur feurt danç.

Ar Missioner.

Divoallit eta ous ar guin
 Rac aori na ziscuefac'h ho min ;
 A ve c'hoas goaffoc'h drouc livet

Evit goude ma oc'h mevet.
 O tremen ur vech dre ur vro ,
 E velis ur mevier maro ,
 Ur voutail oc'h e droat staguet
 E gorf oc'h ar potañç hinset.
 Goulen a ris quelou quear
 Hac e clevis sur gant glac'har
 En doa lazet eman tri den ,
 Ha rac aon na rase biquen
 Quemement all c'hoas da zen ebet
 E voutail hac en a voa crouguet.

Ar Mevier.

Ma ne de quet guir quemement-se
 Me gred e ell arruout ive ,
 N'eus quet pell e voa din darbet
 Laza daou-eus va mignonet
 A zeuas da ober din tevel
 Ecreis va guin ha va c'herel ;
 Quemer a ris diou Bistolen
 Da denna rac tal en o fen ,
 Creoc'h e voant dre c'hraç Doue ,
 Da zifen erfat ho buhe.

Ar Missioner.

Guelet a rit ar maleüriou

Guelomp breman ar pec'hejou
 Pe da re ezeo exposet
 Nep da vesvi a so sujeter.

Ar Mevier.

Ur vamen eo ar mesyenti
 Pe a hini sur e sorti
 A bep fort a bec'hejou bras
 A gaç an den da voas ous voas.
 Souden e vezo un touer
 Leun a vengeance hac a goler,
 Souden e vezo den lubric,
 Souden cus e vadou prodig,
 Pa vezo tout fripet e re,
 Fripa a rai re e vugale,
 Dle leis an ti a zestumo,
 Hep sourcial piou a bæo.

Ar Missioner.

Liquit evez na vezo laër
 Evit e ziveza micher.

Ar Mevier.

N'on quet c'hoas arruet eno.

Ar Missioner.

Divoallit mat quent ho maro.
 Ma ne de quer huan cheuchet.

Ar vuhez oc'heus commancet.

Ar Mevier.

Hac evit chench petra rin-me ?

Ar Missioner.

Renonci d'ar guin hep dale.

Ar Mevier.

Avoalc'h hirio ameus clevet

Evit ma vezo renoncet.

Ar Missioner.

Clasquit breman ur C'honfessor

Quen habil evel un Doctor

Ha leun a garantez Doue,

Da silvidiguez oc'h ene,

Buhan ec'h allio ar Retret,

Ret eo, va map, dezi monet

Evit gallout epad eis de

Netaat manific oc'h ene,

Evit clevet meur a Sermon,

A fortifio ho calon.

Ar Mevier.

Pa vin bet ebars er Retret

A me a vezo pareet ?

Ar Missioner.

Ma guez ameus ho ne'hoic

Non pas hoc'h inclinationou,
 Deoc'h e ta da lacat evez
 Penaos cundui ho puhez.
 Evel un den convalescant
 N'endeus quiet e yec'het constant,
 E tleit goude en em gompoti
 Enep ar pec'het mesventi,
 Ar guin rus evel ar guin guen
 A fellot evel ar vocen,
 Nae Eau de vie, na dour cleret
 Na bier memes, na cistr ebet
 Na danvot nemet gant moder,
 Ma na illit ret e o lezer,
 Da guement a ell ho mesvi,
 Mar doc'h fur e tleit renonci.

Ar Mevier.

Mar deus ur foar pe ur marc'hat,
 Mar deus da ober ur c'hontrat,
 Mar deus Badiant pe Euret,
 Aon bras emeus rac ar sec'het,
 Va c'hontrain a raint da esva
 Ur bane bian da viana.

Ar Missioner.

Var lerc'h e tui ar banne bras

Quent sur evit lavaret graç.
 Va map, en hano da Zoue,
 Evit savetei oc'h ene,
 Dalc'hit erfat d'o promessa,
 O confidei quement-ma.
 Mar en deffe ur Midicin
 Diffennet ouzoc'h effa guin,
 Bete memes ur beraden,
 Miret a rac'h sur e zifen,
 Dreist pep tra mar be lavaret
 Ar guin pa ve deoc'h diffennet
 Ur beraden hepquen effit,
 Antronos vintin e varfit.
 Ne quet guir c'hui a refuse
 Bete an distera banne,
 Pa dleffe an dut caout chagrin
 Ouzoc'h hac oc'h ho midicin,
 Grit evit graç Doue miret
 Ar pez a rac'h evit ho yec'het,
 Ha grit evit gounit an Ee,
 Ar pez a rac'h evit ho puhe.
 Me a ene meur a hini
 A gare guech all me fventi
 D'ar guin o deus tout renouet

Hac an oll so edifiêt,
 O velet ezint quer fidel
 Bepret d'o fromessa santel,
 Den n'en deus outo chagrin,
 Quen nebeut oc'h e vidicin:
 Mæs an oll a ro mil bennos
 D'ar C'honfessor a so bet caos
 Goude graç Doue eus ar vuhez
 A dremenont hep eferez,
 Yac'h int tout ha contant parfet
 En Ee ha voar an douar meulet.

Ar Mevier.

Me a sento ouzoc'h, va Zaz,
 Santout a rane rin erfat.

Ar Missioner.

Pa blich guencoc'h senti ouzin
 Meur a avis c'hoas a roin,
 Cofes a reot da viana
 Bep mis, bep eis de d'ar guella,
 Dreist pep tra er gommançamant
 Evit sur ho contantamant.
 Rac ezom ho pezo alies
 M'ho sicouro dre e vadeles
 Ar Belec mat a guemeres

Pe da hini bepret ezeot ,
 Ur C'honfessor oc'h anaveo
 Hennes quantoc'h ho ficouro ,
 Hac outan e vezot henvel
 Mar dalc'hit erfat d'e guentel.
 Clafquit eta evit cofes
 Un den fur leun a fanteles.

Ar Mevier.

Meur a hini a vezo cavet
 Ra vezo hon Escop meulet.

Ar Missioner.

Mar guillit ne vanquit biquen
 Bemde memes d'an Oferen :
 Eno e cavot ar c'hraçou
 D'o tifen oc'h ho pec'hejou.
 Darn eus an arc'hant a lacac'h
 Diagnet en davarn pa efac'h
 A reot d'ar paour dre garantez
 Ha Doue en devezo truez
 Oufoc'h evel ho pezo bet
 Oc'h ur membr d'e vap biniguet.

Ar Mevier.

Pet paour , sionas , a vife maguet

Ar Missioner.

Mar goufoc'h lenn e quemerot
 Ul leor hac ennan e lennot
 Ar pezh ello touch ho calon
 Ha servich deoc'h da oræson.
 Boet an ene eo al lectur
 Hac an den a so dinatur
 Ne roquet d'an ene he boet
 Endra ma eo ar c'horf maguet.

Ar Mevier.

Mar emeus labour d'ar pemde
 Ha me a rai al lectur-se ?

Ar Missioner.

Len bepret a reot ur bagen
 Pe un anter doucen lignen
 Dibot a vech n'ellot ober
 An nebeut se a c'houlenner.
 Mæs d'ar Suliou ha d'ar Goueliou
 Hiroc'h e vezo ho lecturiou.
 D'an Offeren bret e zeot
 Er Gousperou en em gaffot
 Pell breman ar c'has reservet
 Oc'heus, nequet guir, commetet

Epad an Offiç hep mesvi.

Ar Mevier.

Ne vesven quet , guir eo , bepret
 Mæs allas ! beza e voa pecc'het
 Pa n'em bize nemet ur banne
 Efet epad an amser-se.

Ar Missioner.

Ma ne deus quet pel a Sermon
 Clafquit pe un instruction
 A roi sclerigen d'ho speret
 Ha courach d'ho calon bepret
 E vit finissa ho tevez
 It da Chapelou ar Barres
 Pe d'ar re so tosta dezi
 E vit Doue hac e Sent pidi
 Da gaout oc'h ar mevier truez
 Hac ober dean chench a vuhez.
 Guelit tut paour , guelit tut clan ,
 Consolit arreont hac arreman ,
 Evellen e rcot pinigen
 Hep annui ebet hep anquen ,
 Gant ur joa quer pur quer santel
 N'oe'heus quet c'hoas danvet hen-

Ar Mevier.

Na roit-hu quet ivez ur beden
Evit oc'h ar guin va zifen

Ar Missioner.

C'hui voar ar Chapelet bihan
Ma ne oufoc'h desquet buan.
Manific ezeo expliquet
Er C'hantic nevez composet,
Ur Gurunen eo d'ar Verc'hes
A santifio ho puhez
Mar deut bemde d'e rocita
Hac e vertusiou imita.

Ar Mevier.

Eno en affer goude ar beden
Ober tout hervez hor goulen.

Ar Missioner.

Da Sul, da Vouel ar Rosera
Emeus an Itron Varia,
Refuch eo d'an oll bec'herien,
Ha rac-se d'an oll mezverien,
Pa fell dezo chench a vuhez
Oc'h implori he madelez.

Ar Mevier.

Roit ivez un devotion

Da enori ar Bassion ,
 Rac ret eo squei cre va speret
 Eyit chench va c'halon calet.

Ar Missioner.

Deist pep tra e roan teir *Fater*
 Bemde en enor d'hor Salver ,
 A voa teir heur var ar Groas
 Er C'halvar diaguent ma varvas :
 Songit ezoc'h bet ar bourreo
 Endeus roet dean en e varo
 Ar vestl , ar guinaigr da effa ,
 Hac e galon melconia :
 Teir guech e pocot d'an douar
 En oc'h ene cals a glac'har
 O pidi hor Salver da staga
 Oc'h an douar ar c'halera ,
 Ho quenou quent ma tistroi
 D'ar pec'het cris a vezventi.

Ar Mevier.

Ur yun pep sizun ne ve netra
 Va gloutoni da bunissa.

Ar Missioner.

Evit ar yunou pa songean ,
 D'ho Confessor c'hoas ho cassan ,

Dean da velet gueneoc'h erfar
 Ar pezh dirac Doue a vezo mat
 Herves ho ners hac ho yec'het
 Ha gant ho labour permettet.

Ar Mevier.

Dibot a vech e labouran,
 An anter an amser e efan;
 Ma yunen queit ha ma meus efer,
 Ne ve quet quer buhan tremenet
 Ar C'horais hon eus da ober
 Evel ma on-me bet mevier.

Ar Missioner.

Ho labour gret hervez Doue
 A ziminuo ar C'horais-se,
 It buhan da gaout ho Confessor
 Da gonta dezan oc'h histor,
 Ha goude c'hui a sento ountan
 Na vanquit quet da guement-man.

Ar Mevier.

Costo ge gousto me rai
 Quent evit mont c'hoas da vesvi.

Ar Missioner.

Chetu an avis diveza,
 Mas ne de quet an distera,

Bep bloas d'ar Retret e zeot ;
 Pe er Mission en em gavor ,
 Evit creaat c'hoas ho calon
 O clevet an instruction ,
 Evit cofes ho pec'hejou
 Ha gounit an Indulgeançou.

Ar Mevier.

Me a ene ur mevierez
 E deus chenchet tout a vuhez ;
 Ur pevar bloas so tremenet
 O vont evel-se d'ar Retret.

Ar Missioner.

Penaus , ar groaguez a ef guin ?

Ar Mevier.

Couls da goan evel da lein ,
 Da bep heur ha da bep mare ,
 E pep leac'h , en nos hac en de ,
 Eeveldon-me tout de memes :
 Darn so a gar an efcrez ,
 Eau de vie , guin rus ha guin guen
 A sco alies en o fen.
 Ur c'hoar ameus ouzin henvel ,
 Evel ur vez ous ur porc'hel ,
 Redec a ra d'an tayarnou

En despet d'an oll basadou ;
 A recco digant e friet
 D'he divevi pa eo mevet,
 Ruinet, allas ! eo ganti
 Cass a ra d'an hostellari
 Quemment mat so en tieguez.

Ar Missioner.

Piou an hostis pe hostisez
 A ro dezi guin da efa
 Oc'h ober dei goude pza ?
 Laëres a reont, me er souten
 Ne dint nemet soutirerien,
 Digant ar c'hrec o quemeret
 Enep volonte he friet.
 Couls eo rei guin da ul laërez
 Var gouft ha dispign an hentez ;
 Rac ne deus quet a zifferanç
 Guelet a rit ar gonséquanç.
 Peleac'h e chom ar mevierez
 Me gare e c'haout un devez
 Evit disqueus dezi e fec'het,
 Ma clasco eveldoc'h remed.

Ar Mevier.

C'hui all, va Zat, er C'horais

Pa bresegot en hon Ilis ;
 Parlant enep ar mesventi ;
 Caout a reot c'hoas mui eviti
 A so ctouez ar groaguez
 Sujet aman d'an eferez.

Ar Missioner.

Adeo , va Map , Doue r'o cunduo
 Var ar guella bete ar maro.

Ar Mevier.

Peleac'h e zit-hu quer contant ?

Ar Missioner.

Ha dont gueneme o pe c'hoant ?
 Da brezec ezan d'ar Retret ;
 Ha breman e fell deoc'hu monet ?

Ar Mevier.

Poan ameus sur oc'h ho quitat ;
 Mæs gortoit un nebeut , va Zat ;
 Permetit dre ho madelez ,
 E livirin d'am zieguéz
 E ya ar mevier d'ar Retret ,
 Tout e vezint rejouisset
 Pel so emaint oc'h ma allia
 Da ober at pez a rin brema ,
 Me ya da gana ur ganaouen

A gontanto sur quement den
 A so e ti ar mevier quæz ,
 Ha ma na ziscanan james ,
 Pebes joa a vezo em zi ;
 Mar discanan pet melconi.
 Adeo eta d'ar variquen
 Eus a vin rus pe a vin guen ,
 Adeo d'ar cistr ha d'ar bier
 A ra c'hoas meur a vevier ,
 Adeo guin ardant , dour cleret ,
 Caos oc'h bet ivez d'am c'hlenvet,
 Adeo d'ar pec'het mesventi
 A goll bemde meur a hini ,
 Meur a hini henvel ouzin ,
 Henvel outo mui na vezin ;
 An dour a vezo ma oll joa ,
 Netra quen ne fell din efa ,
 Evit miret grac va Doue
 Ha favetai va ene.

Ar Missioner.

Courach, va map, gant grac Doue,
 E dleit miret en oc'h ene
 O tremen hep guin oc'h amser
 Caout a reot mui a zouçder ;

En dour emeus ho pinigen,
 O viret erfat al Lesen
 Eus ar sobriete santel
 A rento ho puhez henvel
 Ous hini ar Sent he Santefet
 Etoues pere e viot curunet.
 Pidit Doue ma embo lot
 Er gurunen a recevot,
 Ma illin un Eternite
 Meuli gueneoc'h hon Doue :
 Caret bepret e vadelez
 En hon andret daou pec'her quæz.
 It buan, va map, d'o ti breman,
 D'ho teport me chommo aman :
 Mar daleit re, d'ho clasq ezin.

Ar Mevier.

Souden, va Zat ; e tistroin ;
 Avoalc'h, allas, ameus clevet
 D'am divevi pa ven mevet,
 Ha da senti erfat ouzoc'h,
 Er vech-man e vezin furoc'h.

F I N.

*Gant permission Procureur ar Roue
 cus a Quemper.*

